

# CHANSON EUR MELINER YAOUANK

D'HE VESTREZ (\*)



Ken trist eo ma flaneden, ed oun skuis o vouela ;  
E kreiz va brassa anken n'em lakan da gana  
Da velet hag me gavo remed d'am foan speret  
O konta deoc'h va c'hlemmou, tud iaouank selaouet :

Me zo 'r paourkez meliner, hi zo merc'h tiegez ;  
Goude beza he c'haret, me zo karet iveauz ;  
Ne voan nemed eur bugel hag hi bianik tre  
Pa n'oa gret anaoudegez an eil euz egile.

Evel ne oa etrezomp nemet eur park hebken,  
Vijomp bepred assamblez o c'hoari, o pourmen,  
O c'hoari, o ebata, heb kont hag heb muzul,  
Er c'hatekiz avechou, an offeren d'ar zul.

An dud demeuz hor guelet lavare etrezo :  
Reakomp beza breur hag c'hoar pa n'em c'heuillimp ato  
Nikun nijé bet sonjet a voa an ebatou  
O c'hober ar skoulm kenta etre hor c'halonou.

O bugaleach evruz ha pell zo tremenet !  
A boan gret hor pask kenta ni voa disparliet ;  
Hi voa kasset da Vriek, laket e pansion,  
Me ieaz gant va c'heren d'an tu all d'ar c'hanton.

Va zad o veza merour, fermaz eur veil nevez ;  
Red voa din-me labonrat hag chench kren a vuez ;  
Diski lemma ar velin, ober potr meliner,  
Digor an dour er skluziou hag peb tra en hor ger.

Dont a reaz ar mare da vonet mez er vro  
Biskoaz deuz ma c'hoar vian n'em boa klevet kelo,  
Deuz he c'heren ken nebeut glevan mui kozeal,  
Heb ma c'hellan gouskoude donet d'he dizonal.

Achu va zri bloa servich, d'ar rag-eost diveza  
Tigouezan e ti va zad, laouen en eur gana,  
Henvel enz eur goulvennik hi libr he diouaskell,  
O vonet mez eur gaouet, a gan, a nij bell.

O vonet prestik goude da vel va mignonet,  
Tistroan divoar va c'hent heb digarez ebet  
Evel pa vijen poulzet da dremen dre ar ger  
E pehini boa bevet va evrusa amzer.

An dud a voa o torna, penrzastum an id du ;  
Iudal re ar mekanik, prez a voa e peb tu ;  
Voar ma c'halonik iveauz a voa prez voarnezi  
Kemen evel a lamme o tostad deuz an ti :

« Demad d'eoc'h-tu Franseza, hag mad a iet bepred ?  
— Mar ia kenkoulz diganeoc'h, den iaouank didosted ;  
Martreze o peuz sec'het, azezet eun tammik  
Da c'hortoz ken teur va mamm zo et da gerc'het sit.

— Gant plijadur azezin evit din n'oun ket skuiz  
Tri de zo eman distro demeuz a Zant-Denis,  
Hag ben eik devez aman a vo pevarzec vloa  
Voan azezet n'ho kichen 'vit ar vech' diveza.

— Nec'het braz oun emezi gouskoude gret ket din  
N'em fazian deuz ho kemer 'vit Laouik ar Velin ;  
Touzet peuz ho pleo melen, chenchet henvelizel,  
Mez ho mouez-hag ho savar zo bepred ar memez.

— Kemen neuz gret an amzer n'eo ket 'vidon hedken,  
Pep-tra a neuz he dammik hag c'hui peuz ho loden ;  
Ar plant yaouank c'bell breman dougen frouez hag bleuniou  
Hag bremaïk teui da zevel keoni deuz ho zrouoj. »

Prestik neuze ligouezaz he mamm ebarz an ti ;  
Chom a ran c'hoaz eun tammik da gomzeal ganti ;  
Kalz c'hiroch vijen chomet, mar vijen bet dibrez  
Ken berr gavan an amzer en ho c'homagnunez.

Da zevez gouell an Oll Zant n'em gavomp adare  
Assemblez 'barz e Briec c'heva bep a vanne,  
Hag ken 'vit n'em zepari ni devoa lavaret  
An eil d'egile ac'hanomp e vijomp daou bried.

O pegen koant he c'havan neuze o vouzc'hoarzin ;  
Ruzia a re he diou chod gant eur zellik ouzin,  
Hag ma vije avechou nec'het en he c'homzou,  
He daoulagad lavare pez na re he ginou.

Red vijé deoc'h he guelet azezet em c'hichen,  
Hi guisket ken deread, eur las du n'he c'herrien,  
Gant eun ærik ken chiant, eur vonezik ken tener  
Geiz ar lapoussed munud a zo rust n'he c'henver.

Karout a raffen beza ar mean voar behini  
Ve laket be zroadik skanv evit tremen ar pri,  
Pe eur bokedik melen e cornik he jardin  
Martreze va dastumfe da lakat n'he feultrin.

N'ellan mui divoar neuze he c'has deuz ma speret ;  
He zellik dous hag tener bare voarnon bepred ;  
Bepred a zeblante din he c'hlevet huanad  
Hag guel ar skeud anezi dirag va daoulagad.

He c'haret, he zervicha, beva en he c'hichen,  
Ve 'vidon eur blijadur n'oun ket rei da goumpren.  
Karet hag beza karet, hervez ma zaotiman,  
Zo evrusted ne ma ket ho flas 'bars er bed-man.

Er foarion, er pardonnou a n'em c'heuillimp goude,  
Plujadur en em gavet an eil gant egile ;  
Birviken nijomp sonjet vije dent eun amzer  
Vije fin d'hon evrusted hag d'hor preposiou kaer.

C'hoaz dragarompkad Done, n'eo ket ar goall deotou  
C'helfe lakat ienjen etre hor c'halonou,  
Mez an arc'hant milliget, eun daou pe dri c'chant skoet  
Vir ouzomp dont asamblez, ren ket da n'em garet.

Pa voan bet euz he goulen bremen a zo eur miz  
Digant he zad hag he mamm, evel ema ar giz,  
A voa roi din da c'houzout voan ket d'ho zantimant  
Hag Franzeza, emezo, n'ho ket 'n'hini n'ho c'hoant.

Me gar-je bije biskoaz klevet ar c'homzou-ze  
Pere a gonezaz voarnon evel toliou kleze ;  
Va izili a grene, va c'halon baour em c'breiz  
A gredan vije rannet siouaz gant an ankreiz.

Ne zeuz den evit compren va foan, va rann-galon,  
Nemet n'em gaout a rafte 'n'en henvelep faeson ;  
Goude kemen h̄e c'haret, beza karet ganti,  
O pebeuz displujadur, o trista disparti !

Ar glac'har, ar velkoni keuz an eil d'egile  
A zeuio dre c'hras Done d'hon diskenn prest er be  
Henvet deuz a zaou voket distag deuz he zrojou  
A zeu founuz da voenvi hag da golli ho bleuniou.

Klevet a meuz abaoue zo c'hoant d'he dimezi  
Da vab eun den pinvidik ker oc'h ker diouthi :  
« Nan birviken emezi dimezi na rin ket  
Nemet am be an hini meuz c'hoant evit pried.

Kant guech ve guelloc'h ganin kaout nemet bara z'ech  
Dre garantez evidon gonnec gant poan divrec'h.  
Evit beza goall evruz en eur zont da gemer  
An neb n'hellin da garout nag pa be c'hoant d'ober. »

An esper da gleo kana ar verz-ma 'barz em bro,  
Zeu da zousad enn tammik va foaniou ken c'houero,  
Kanit eta anez, tud iaouank, me ped,  
Er foariou, er pardonneou, hag kemen lec'h iafet.

(Tous droits réservés.)

KOLAÏK P.

## KLEMMOU AR BENNEREZ

Kaerad ra ar meziou, asten a ra an de ;  
Ar lapousset a gan mesk an deliou neve ;  
Dre gichenik ma zi tud iaouank a dremen  
O vont da bardouna, ken joauz, ken laouen.

Siouaz l' evidom-me ar c'haera deveziou  
Zo gret a velkoni, a c'huannadennou :  
An hini a garan a neuz va dilezet  
Hag gantan ma c'halon d'he c'heul a neuz kasset.

Paourik voa em c'henver, gouskoude he garan ;  
Dreist oll he vertuziou a zo d'am zantiman,  
He speret mad a zo kenkoulz he honestiz  
Dibodik da gavet emesk ar yaouankiz.

Ar glac'har da vez a bet digemeret fall,  
Neuz gret dezan kemer var he goust da dec'hall,  
O sonjal martreze en n'euro zont d'am c'huitad  
E vijen va unan deut d'he ankounac'h ad.

Mar neuz kredet 'velse dont da vouga an tan  
Pehini em c'halon neuz c'huezet he c'human  
Eo n'em gemeret fall birviken na c'hello  
Dizoer r' pez zo gret evit padout ato.

Va dilezet a neuz, mez piou a rai din-me  
Da gredi a neuz gret gant he guir volonté ?  
Piou rai din da gredi ve chenchet em andret  
Balamour ma virer ouzin d'he gemeret ?

Neb zeuffe d'he ober rai nemed va zrompla ;  
'Vit ar re a n'em gar eveldomp er bed-ma ;  
'Vit ar re eveldomp n'em gar he guirionez  
Ar poannioù ren nemet kreski ar garantez.

Beb mare, siouaz din, e gouelek ma speret,  
Stremvelan anezan kastiz hag fall-livet,

Hirvondi, o vouela, o n'em glem ac'hanoù  
Da vez a kiriek d'he boan, d'he rann-galon.

Pa zonjan kemen-se ma c'halonik a rann,  
Hag me am benz neuze diou boan eleac'h unan ;  
N'eo ket avoalc'h he goll, he velet c'hoaz goude  
Er boan hag en anken abalamour d'in-me !

Va maloz d'am danvez em lak ken reuzeudik,  
Pa n'ont ket evuruz o vez a pinyidik.  
Eo guel ganin beza an diveza paourez,  
Ve emesk ar loenet deuz an noz o c'hourvez.

Hounez da viana voar he c'hrabanad plouz  
'Vit dezi beza paour a c'hell kousket didrouz ;  
Lec'h me barz va guele ran nemet n'em ruilla  
Hed an noz heb gallout memez n'em ziskuiza.

Na rin ket gouskoude evel hiniennou  
Ia da guz 'ho glac'har ebarz ar c'houanchou ;  
En n'ho touez a fell-din merc'het iaouank Briec  
Chom c'hoaz eur pennadik da glask va amezek.

E kornik va liorzh a zo eur blantennik  
He brankou dizec'het a vary bep eun tammik,  
Kaer am euz he dourad hag mont stank d'he guelet  
N'hellan ket dont abenn da c'houzout he c'hlevet.

Yaouank evel dezi, diouti hon henvet,  
Rin nemet kastiza ken zeuin da verval ;  
Ar ieot evit beva neuz izom doussijen  
Va c'halon karantez neb garo da viken.

Kanet lapoussigou mesk an deliou neve  
'Vit ar re zo evruz, ne ket evidon-me,  
Hag c'hui oll dud iaouank 'vit mont d'ar pardonneou  
Diskit ma c'hannaouen da gan hed an henchou.

(Tous droits réservés.)

KOLAÏK P.